

YF_0107_Disput etre ar C'hernevad hag an Tregeriad

Evidon bezañ arru koz am-eus c'hoant ken mervel
D'ober ur zon da ganañ e-barz en Breiz-Izel
Da impliañ ma spered da rimañ un disput
Etre daou zen añcien estimet gand an dud

Unan anezho a zo anvet Gilles an Tregeriad
Egile a zo e ano Pipi ar C'hernevad
Seblantiñ a raent o-daou bezañ tud a feson
Krediñ a ran int estimet pep hini en e ganton

Me a oa aet er zadorn all d'ar marc'had da Wengamp
Oan ket abred d'arruoud, ma c'hoz varc'h n'eo ket amp
Pa oa arru ar c'hreiz-deiz, kasi graet ma marc'had
En eur vond d'an traon gand ar ru e kavis ur c'hamerad

Antreal a rejom on-daou en un otel deus ar ger
Ha ni ha goulenn d'evañ daou chopinad bier
Pa oam azezet ouzh taol on-eus klevet raktal
Un disput deus ar gwasañ er penn all deus ar zal

Etre daou zen añcien ha n'o anavem ket
Memestra on-doa plijadur o toned d'o c'hleved
Unan anezho e oa Kernevad, Kernevad chupenn verr
Egile livitenneg deus a goste Treger

Pep hini a gaoze el langaj mod e vro
Er feson-ze mar gallan me ho tezrevello
Seblantiñ a raent o-daou bezañ tud a feson
Pinvig hag estimet mad, pephini en e ganton (pinvidig)

An Tregeriad a gomañsas da gentañ riotal
Med resevet mad e oa ha degemeret fall

An Tregeriad

Me, emezañ, am-eus anv eus ar Gernevaded
Rag honnez a zo ur vro vad hervez am-eus klevet

Enni a zo foen er prajou hag ed er parkeier
Ni n'on-eus netra a vad e-barz en kostez Treger
Ar re-man a zo toud pinvig hervez am-eus klevet
Desket-braz, leun a skiant ha karget a spered

Enni a zo saoud ha kezeg, loened mad da werzañ
Ar Gernevaded, aze, brav eo awalc'h dezho bevañ

Ar C'hernevad

Fidedouar, feusket ez on da zond da riotal
C'hwi marteze a zonj ganeoh hag ez eo sod ar re-all

En Kerne a dachennou e kaver lanneier
Med boud a ra douar mad kenkoulz evel en Treger
Boud a ra paour ha pinvig a bep seurt kalite
E-barz en kostez Treger a gredan ivez

Bezañ a ra tud a feson, bezañ a ra 'canailles'
Med ken fall evel Tregeriz, na n'int bet jamez
Eus ur c'hernevad a ya da dremen 'Cour d'assises'
Mond a ra ouzpen ugent dimeuz a Dregeriz

E-lec'h ma veng kondaonet da vont da'r galecou
Da berisan gant famin da debrin gant al laou

Te az-peus ordinal mepris evit ar Gerneveded
Se a zo 'cause' e lavares n'o-deus ket a spered.

Met ni on-eus ur e Plougerneve
E-lec'h ma teues da sk... vugale ha te
Evit bezan hir da chupenn, barv dindan da fri
Me map por gonto kuit er feson ma kari

Me gonto guiac'h en galleg, en latin hag en greg
Pe mar geo gwelloc'h ganeoc'h c'hoariomp en brezhoneg
Te az-peus serret ur bern deus ar pezh na goust mann
Un hanter muioch a voged so ganit evit a dan.

An Tregeriad

Ma hine setu aman un den deus an drolan
Evit ur badinerez eo deuet d'en em fachan
Breman a gredan parfet da bez am-eus klevet
A zo tud e-barzh en Kerne sotoc'h evit o loened.

Te na n'out 'met ur vanteur, ur pompeur, ur gaouiad
Aset a-walc'h he gouvret penaoz out Kernevad
Hervez klevet a hanoat, te zo un den savant
Me a zo bet ivez er skol gwechall pa oan yaouank.

En ez bro e lavares az-peus ur seminer
Ni on-eus ivez unan e-barz e Landreger
Lec'h ma zo profesourien a oar latin ha greg
N'eo ket ret mont da Gerne evit bezan studiet.

Hervez klevet ac'hanout, te zo pinvidik bras
Me lavar hervez ma sonj penaoz ez out paour-raz
Kement gwech a valeer e-barz en kostez Kerne
Partout a weler skrivet miser ha paourentez

Ul logen an disteran a servij dit da di
En Treger vez ket bet mat d'ober ur marchosi
Debrin a rez bara gros patatez peilh ha toud
Tremen a rank pezh ha pezh e-barz en toul da c'houg.

Da venaj deus al lousan am-eus gwelet james
Tud enor na c'houlfent ket antren en ez tiegez
En Kerne hervez larez out karget a furnez
Ha Treger he er fantan deus er falagries

Koulskoude me a zo bet alies er jure
Gwelet am-eus kondaoni kalz dimeuz a Gerne
Da vonet d'ar galeou d'echuin o deiziou
Evit resev er rekompan dimeuz o vertuou

Ar C'hernevad

Ret

Me am-eus baleet pell zo hag a-dost hag a-bell
E kement "terroir" a zo e Breizh-Izel

Hag al lousan menajo am-eus gwelet biskoaz
Am-eus kavet ordinal e-barz en Treger-Vraz
Du-man pa erru un den da e-barz an ti
Dioustu a ouelou e skeud partoud o lugernin

En Kerne a zo merc'hed soutil
a zo kapabl da zalc'hen ur menaj en "état"
E-barz en Kerne a larez eo dister an tier

Kement den a zo a oar a-walc'h out ... laret gevier

Kar boud a ra tier kaer boud a ra
E-lec'h ma chom aotronez vras med da galz a vadou
Kement den a oar a-walc'h kar partoud e larer
Ha 'z eo pinvidikoc'h bro Gerne evit Treger

An Tregeriad

'Gredan ket out ken pinv'ig rak ne ... en er
Da vezan a nep feson "supérieur" ... Dreger
Du-ze a zo kirri kavel gant an dud
Daou gwele hag ur c'hoz ros... warne

Gant da gezek divhar voan hag o reerou gever
Er seurt-se na vent ket bet estimet en Treger
Mar deufes gant da harnes dre du-man da vale
Ret vefe d'an dud d'he gwelet evel dre "gurirosité"

Dre du-man e kaver kezeg a zo ledan o senvier
Kirri bras a zo war o lec'h a zo "lourd" ha ponner
Me am-eus pemp a gezeg da stagan war ma c'harr
Pa gomansont da gerzet, krenan a ra an douar

Sur a-walc'h mar balefeng war paveou Kerne
A digorfes da c'henou da sellet etrezek deze
Du-man ha merc'hed bemdez da gas lez e-barz en ker
Bemdez e teu arc'hant ganto en o godell d'ar ger

Ar C'hernevad

Biskoaz n'am-eus gwelet ken aveurtel ha te
Te fot dit laret e vez hanter noz da greisteiz (= te fellfe)
'Gredan ket out sot da sonjal na spered
Da gavet koseg a bris evel ar Gerneveded

Ur jo hec'h-unan a ya mil liver
Marteze da harnez vras nefe ket den hanter
Gant da gezeg reerou bras ha d'o c'hristilhennou
Ober a rez kalz a drouz en ur vont gant an hentou

Du-man e stager c'hwec'h ejen ha pevar a gezeg
Hag e-neus gwelloc'h harnez evit an Dregeriaded
Sur a-walc'h ma vent staget war da harnez ha te
Refe dit dont a-souez-drenv da vale da Gerne

Da verc'hed a ya en ker da gas koaven bemdez
An hanter deus an arc'hant a lakaent e-barz er c'hafé
En Kerne n'eer ket bemdez da gas lez d'ar c'heriou
Pa vez gwerzet yalc'hadou

Pevar pe pemp mil liver c'hwec'h pe seiz alies
Ken ma vo bet kement all vo labour da gas lez
Pa vo dastumet en aest e-barz en kostez Treger
Hi bemdez gat da harnez da gas kargou en ker

Mes pa vo arru ... ha krog er vadelen
A vi goloet ha ... da sac'h en goadegen
Ar c'hernevad nemet ret dezan gwerzan hi aest
Gant arc'hant en ... bras a ve pevet er-mez

Mar gay en ed da vankout ur blavez benaket
En solier ar c'hernevad a vo kavet bepred

An Tregeriad

Klevet am-eus alies deus Kerne
Biskoaz den n'am-eus klevet o veulin er vro-se

En Treger a zo partoud soillou deus ar c'heran
Bara gwiniz da ... ha gwin da evan
En Kerne.....ober tud hep danvez
En un Tregeriad a zo danvez daou he sort-se

Hanval int eusho brageier
Da evesaat.....en Treger
Du-man zo gwarzed yaouank ha blev war o bruched
A rafe nebeut a ... deus ar gernevaded

Kredin a ran mar krogfent coillerou dar ne
E c'hallfent sonjal hardi en "éternité"

Ar C'hernevad

Biken n'am-bije sonjet a vijes bet ken diot
Na ken hardi da laret kement a langach sot

Nep a gredfe ec'han... serten a lavarfe
E-barz en kostez Kerne n'eus nemet bugale
'Gredan ket out bet biskoaz e-mesk ar Gernevaded
Ar rennez en-eus tromplet kalz a dregeriaded

Dre zu-man zo paotred vihan a zo leun o dilhad
A lakfe boutonou Tregeriz da hoalat
"Nonobstant" e lavarez ez int graet hep danvez
Biskoaz n'eo bet tregeriz da choaz gante

Mar vez savet un arme deus a gernevaded
Da vont da ober brezel ouzh an dregeriaded
Gwelet a raves timat a-raok fin ar barti
Kas tregeriz a-souz-drenv hag er mor da veuzin

An nep a vez sot a-walc'h da gredin ac'hanout
A larfe e-barz en Treger a vez tud jentil toud
Debrin a rez bara flour evet gwin ar finan
Goude-se en-defe labour o vonet da blegan

Hervez klevet ac'hanout te a zo un diaoul a baotr
Mes ne gredan ket zo kalz arc'hant e-barz da chakod
Evit dalc'hen laurens er grand hant henors e-barz ar sal
E ve da "borte-monnaie" gant famin o yudal

An Tregeriad

Pa ne c'houlez konsantin ... gant da baotred
Gwelomp breman ma karez divhar ar merc'hed
Me a oa bet er sizun all en Kerne o vale
A wele merc'hed gwisket gant nebeut a zanvez

Gant o chupenn voar valank ha gant chignonned
Oan ket evit harz da c'hoarzin na pa vijen krouget
Gredan ket e vez moaien d'ober petra gante
En Treger vent ket bet mat da "soignal" bugale

Ar C'hernevad

Mar deufes ur wech bennak da foar Sant Nikolez
Te a ve lakaet souezet gant ar gernevadez
Pa vez honnez o tansal ha dal Corlay o son
E oar just deus en noten labourat e zalon

Korfet ken mousth ha ken skanv, ken "gai" ha ken liger

Kredin a ran a refe mez da flakennou Treger
Chignonet ganti he blev seber he divlagad
Kaozeal "humbl" eus en oll karge a feson vad

Da re a zo leun a "orgueil" hag a ... oriusted
Se a zo "cause" da kalz ha ne gavan ket a baotred
Gwelet am-eus Tregeriz e-barz en Breizh o tansal
Hanval int ouzh berniou teil poan dezho da finval

An Tregeriad

'-peus ket ezhomm da bompi kement gant da verc'hed
He ma liv ar pis-toutou voar da zimezeled
Hanval int eus bugale livet gwenn morfoennet
Kredin a-walc'h a rafen diferi ket hanter voued

Hon re a zo gros ha lart ha ruz ho lipennou
Merc'hed o-deus "eloquence" dre an arsembleou
Ur plac'h a Dreger a zo trec'h da ziv deus ar seurt-se
Dougen a rafent unan dindan pep gazel dezhe

Ar C'hernevad

Me am-boas klevet laret oa pell zo e amzer
E oa kalz a dud diot e-barz en kostez Treger

Te evelkent a renk bezan an hini diotan
Feusket finneit boe oas bet sodet er wech kentan
Gant da verc'hed e erru evel gant da baotred
Biskoaz ne ding bet evit ar Gernevaded

Tregeriz o-deus merc'hed a zo koustus da zalc'hen
Gav ket de ve kaer a-walc'h james en doaleten
Ho chouet zo boutet a-drenv, ho blev zo bletonet
Ne oaran penaoz d'ober evit plijout d'ar baotred

Hon re zo gwisket modest ha karget a furnez
Maest er merc'hed e-barz er Frans he er gernevadez
Gant he feson grasijs, hag he "air ravissant"
Lemel hera map hi vam er-mez ar zen yaouank

Pa deuio paotred yaouank d'ar vro da glask gwiragez
Vo dalc'hmat ar breferans evit merc'hed Kerne.

An Tregeriad

Marteze e poent a-walc'h finisan ar "procès"
Tud evelomp vo ket kavet alies asamblez

Setu ni pell zo aman hon daou ha kombatin
Pephini difen e vro ha kuit a facheri
Biken n'am-bije sonjet a vije bet kavet
Tud ken "raisonabl" ha c'hwi e-mesk ar gernevaded

Evomp c'hoaz.....da derrin hon sec'hed
Stinkomp hon daou asamblez evel gwir vignoned

Ar C'hernevad

C'hwi ho-peus da gentan komanset ar parti
Mar peus c'hoant da finisan me zo ken prest ha c'hwi

C'hwi ho-poa ordinair air un den a feson
Biken n'am-bije sonjet ho-pije koulz kalon
Mar me biken en enor d'ho kwelet en Kerne
Me a deuio d'ho saludin gant pep "humilité"

Joa a rafe d'am c'halon ho kwelet e-barz em zi
Deus ar seurt gwellan a mes donnet doc'h regali
O daou o-deus glac'har vras o tont da en em guitaat
Ken a rede an daerou deus o daoulagad

Prometin a renk o-daou, an eil hag egile
A vijent gwir vignoned betek fin o buhez
An nep en-eus graet ar son a zo erru gwenn e varo
Kollet en-eus e "vemoire" n'eo ken evit rimo

Mar vijen bet studiet evel kalz a dud desket
Am-bije muioc'h a stumm da riman brezhoneg
Graet am-eus meur a "chanson" abaoe ma 'z on er bed-man
Marteze e vo homan an hini diwezhan

Arru eo pleget ma choug, kleuzan a ra ma bisaj
Me nifou evit an deiziou en douar evit partaj
Santout a ran an Ankou e-kichen ma seuilhou
'Zo prest da lakaat e falz d'achuin ma deiziou

Pa glevfet e vin maro ho pedan en anv Doue
Da lavaret ur beden evit repoze ma ene
Mar am-eus lavaret netra a zroug en em chanson
Eus Doue hag eus an dud e c'houlennan pardon

Karget a "humilité" o donet d'ho kuitaat
Goulen a ran evidomp oll digant Doue hon tad
Ur yec'hed ar parfetan da hedan on buhez
"Tranquilité" ha "bonheur", "chance" ha "prospérité"

Ma vo an Dregeriaded hag ar Gernevaded
Mignoned da virviken en palez an Drinded
En kompagnunez ar sent, an aele, ar werc'hez
Kurunet en kreiz er gloar da virviken james

Evel-se bezañ graet

A. Kerien

Kavet e vez e-barz ar pennad a-us un toullad gerioù galleg brezhonekaet tamm pe damm.